

écrit. de Penguern.

(69 recto)  
(84)

## Herve ar Jolli.

Herve ar Jollic, an den val  
 Zo hed gand dud chentil da vro hall (p: Galles  
 Ag a zo retornet var e his (en france).  
 ewit ober mez da Kawanis

Herve ar Jolli a lavare  
 en hostaleri pa hentree  
 — Bonjour a joa bars an ti man  
 A be a zo peadra enan  
 Da rei da eun den da goanian.

— Pell a zo neket bed en ti man  
 War rei ia hunan da goanian.

— herve ar Jolli a lavare  
 Da dud an ti nag an de se :  
 — Mar g'ari an otro provost aman,  
 En an' Doue ma nac'het outan.

An otro ar provost a lavare  
 En hostaleri pa hentree :  
 — Bonjour a joa oll en ti man  
 Ne man quiet herve ar Jolli enan.

An hostis pan eus klewet  
 D'an otro provost an deus laret :

— Mar man herve ar Jolli en zi  
 e he lojet ebars eb gout din.  
 — Mar man herve ar Jollic en o ti  
 Man Doue man nac'het ked ouin  
 Rag en Kad da harcher en fel din.

Herve ar Jolli pan' <sup>(1)</sup>neus klewet

(1).- n (de pan') a été ajouté.

(69 verso)

Ar strau gant ar vins, e diskenet.

An otro ar Provost e neus salludet.

— Te, emean, zo seiz vla zo war ma c'halier  
Ma kerz e vi ma c'hentan c'harcher,  
A kers breman da Lanhuon  
Da gass an traou laer may d'ar prison.

— Me, emean n'in keld da Lanhuon  
Gant dont rag ar c'hornt ag ar baron

— Neus na komt na baron na Krete  
toll e dorn war archer dar Roue.

Me rei did eun habid newe  
A vo karget a livo ma re  
A vo karget did deus a livo  
Lib da vale hardi en peb bro.

herve ar Jolli a lavare  
En ker Lanhuon pa c'harrie.

(70 recto)  
~~(85)~~

Bonjour a joa oll er ger man  
E medi ar prison pelec'h e man  
Ma c'hai ay daou laer may da vreinan

— herve ar Jolli red keld a woab,  
Kad vo prison arwoalc'h do lakad  
— Woa ked ar gite peur achuet  
A voa tri ugent a soudardet  
Ag eur c'hement all a dragonet  
A zo c'hoec'h ugent mar g'iententet

Ter heur day horloch, men woar ar vat  
E bed herve ar Jolli en gombat  
Pa woelas er vad e woa goassan  
E lezas e c'harmo da goëan  
Chedint arze c'haach a klenve  
A re ze neus bed mer a vuhe  
A ma benos a roan gante

An otro ar Provost a levere

389

(70 verso)

Da herve ar Jolli an de se :  
 En tre Lanhuon a Landreger  
 E moa marchet alliez en Kever,  
 Na na Kredez Ket avanturi  
 Rag trec'h voa ta nerez d'ar ini

— herve ar Jolli a lavare  
 D'an otro Provost an de se  
 — mije [Ket] a gun Kouitat ar bed  
 Penevert honont, Klemens ar Klujart  
 Zo manet ma goude miserabl —  
 Dac'h otro Provost ~~me o~~ ne c'haffen mad

a mar gan fenos bars ar bassefos  
 Me a renk'o kat eur goñle kloz  
 Ar eur plac'h koant da Kousta ganin en noz

An dud a justig pro deus kleoret  
 da herve ar Joli o deus laret  
 — Preparat a vo did eur feumelen  
 Ar a loj an noz en Kreiz an dachen  
 A rei brechik kloz en en Ket]her  
 A zo e chanon ar c'hanaben.

[Au 71 recto, seulement un titre :]

(71 recto)

Babylon  
 }

[rien au 71 verso.]